



GWERZ NEVE

ZAVET ENN ENOR DA

ZANT VAURIS

Euz a behni ar chapel, e parrez Zan-Vèk, a so meur-
bet hentet gant ar gristenien vad.

War don : *Ni ho salud, Stereden vor.*

DISKAN :

O zant bras ebars ann Envou
Gouennet evidomp grasou !
Ners hag iec'het peoc'h, ha pardon,
Karante Doue n'hon c'halon !

- 1. Chilaouet, m'ho ped, Bretonet,
Bue eur zant, eunn den kalet,
Bue Mauris, soudard Jesus,
Ha mignon ann dud ankeniuz.
- 2. Enn eur glevet he oll boaniou,
Skrivomp don enn hon sperejou,
Ema ret evit mont d'ar gloar,
Andur gant fe war ann douar,
- 3. Goude hon zalver daou-c'hant vla,
Ebars enn plenen Agona,
E kichen Frans, eur vro brudet,
Mauris a zo bet merzeriet.
- 4. Ann impaler Maximian,
Eur prins dirollet ha Paian ;
A c'halvaz Mauris da vonet
D'ar brezel gant he zoudardet.

- 5. N'en devoa ket enn he arme
Gwelloc'h zoudardet evit-he ;
Prest da zenti ha da gerzat
E kreiz ann tan hag ar gombat.
- 6. Ouspenn, Mauris hag he vanden
A oa start el lezen gristen,
Hag enn eur dougen ar c'hleze,
E vevent e doujans Doue.
- 7. Gant he fals doueou dallet,
Ann impaler, p'en deuz klevet,
Leun a fulor hag a gounar,
A glask Mauris, hag a lavar :
- 8. Petra glevann-me, kabiten !
C'houi, skouer ann armeou romen,
A dilesfe hep mez ebed
Doueou Rom, mestres ar bed !

9. *Mauris, Mauris, ma chilaouet,
Kenkous ha c'houl, he zoudardet,
Adoret doueou ar Vro,
Pe d'ar vue, pe d'ar maro.*

10. *Raktal, he dorn war he gleze,
He daoulagad war-zu Doue,
Mauris, bepret krenv ha dispont,
Da Vaximian a respont :*

11. *Impaler bras ar Romanet,
Ni zo, gwir eo, ho soudardet,
D'ac'h eo hon c'horf, mes hon iue
zo bet prenet gant Mab Doue :*

12. *C'houl ro d'imp enor ann armou :
Mes digant Doue ann Envou,
War hon zechou fall pa drec'homp
E teu kueroc'h enor warnomp ;*

13. *C'houl ro d'imp hon magadurez
Mes Doue, dre he vridelez
A dalc'h enn hon memprou bue :
Hen da gentan, ha c'houl goude !*

14. *Evidoc'h ni skuillo hon goad,
Beteg ann divezan berad :
D'ho toueou. oh ! nann, biken
Na rimp nag ezans na peden !*

15. *Dav u dra pelzo hon euz touet :
Karet Doue, hag ho karet ;
Mes, mar disprifemp hon c'hrouer,
Perak plejan d'hon impaler ?*

16. *Hon breuder hoc'h euz merzeriet,
Evel Jezuz int bet lazet,
Ha gant Jezuz n'he Varadoz,
Emant breman ouz hon gortoz.*

17. *Pa c'houlfemp impli hon c'hleze
Warnoc'h e trec'hfemp marteze.
N'ho pel ket aoun, ni a bedo
Evidoc'h c'hoaz war ar maro.*

18. *Pegen kaer eo merveldi vlam
War galon Jezus hag he Vamm !
Na vimp ket treitour d'hon tezen,
Kristen omp evit eur biken.*

19. *Pa glev ar pañan dinatur
Komjou ken nerzuz ha ken lur,
Ho c'hondaonaz, oll a vanden,
Eno da vervel, enn draouien*

20. *Ar c'habiten, a vouez uhel,
D'he dud a lare, keat mervel,
« Na grenet ket, ma breuder ker,
O pebez gloar, gloar ar merzer ! »*

21. *Ha war ho daoulin, dizarmet,
Ho goue e noaz ho deuz laket :
Ar bourrev a sko, didrue,
Ho goad a red gant ho bue*

22. *Pesort kalon na vije ket
Gant ar glac'har neuze rannet,
O sellet ouz tud a vrezel,
Evel oant kez o vervel.*

23. *Elet, gant peb a gurunen,
A diskennaz war ann dachen ;
Ha zul tol bourrev e tougent
Eunn ene da balez ar Zent.*

24. *Prestik ive war ann douar
E voe anaveet ho gloar ;
Ha warlerc'h ken hir eunn amzer
Ho feder c'hoaz hag ho meuler.*

25. *E Zan Vek, e kreiz Breiz-Izel,
Zant Vauris en deuz eur chapel ;
Kalz a deu da glask he zikour,
Hag euz he feunte d'evet dour.*

26. *O lec'h a belzo beniget,
Gant hon tud koz darempredet,
Zellou Mauris warnoc'h a bar,
Houl zo he di war ann douar.*

27. *Portret ar zant, he relegou,
He feunte a ra burzudou :
O Bretonet, pebez tensor,
E Zan-Vauris a zo digor !*

28. *C'houl, tud dalc'het gant klenvejou,
C'houl tud poaniet enn ho memprou,
Paour pe binvik, e peb mare,
Bet fians enn he drugare*

29. *C'houl, pried mad ha mamm dener
Petra neuze ket gret n'ho kenver ?
Dizec'het en deus ho taerou,
Rentet ar peoc'h d'ho kalonou.*

30. *Bugelik koant neve ganet,
Den koz gant ann oad diskaret,
C'houl dreist oll, zoudardet ar vro,
Mauris ho kar hag ho karo.*

31. *Goulennet iec'het digantan,
Iec'het ann ene da gentan ;
Ar c'horf, kaer a vez, a gouezo,
Ann ene bepred a bado.*

32. *Goulennet ma chomo dalc'hmad
Deñn ho re-vian war ann hent mad,
Mac'h amzavint evit Roue
Jezuz ho zad hag ho Doue.*

33. *Ken na vimp eet oll war-ann-dro,
Tud ha bugale, d'hon gwir vro,
Bro ar Zent, bro hon tadou koz,
Enn eürusted ar Baradoz.*

AMEN ! AMEN !

Propriété de l'Éditeur, Vve LE GOFFIC.,